

GWERZ WAR LAZEREZ SANT-THEGONNEK

(Pevar Bugel vihan troc'het ho gouzouk gant eur Vatez)



WAR DON : *Petra zo 'nevez e ker Is.*

1

Tostaït oll hag o klefet
Ar werz a zo 'nevez savet
War eun torfet braz, dinatur,
Lazerez pevar kraouadur
Gant ar vatez a Gerorven,
D'ar zul epad an oferen.

2

An tad, ar vam, an daou den kez,
'Doa lezet en ti ar vatez ;
Gant ar vugale he-unan,
An dorojou prennas buan,
Eur gountel vraz a gemeras
Gouzouk ar c'hosa a troc'haz.

3

Deuz ar re-all ker spouronnet,
Truez ebet 'gemeras ket,
Goude an eil hag an trede
A zeuas tro ar bevare.
War leur an ti ruilhe ar goad
Ker stank hag an deliou er c'hoad.

4

D'ar bourk neuze en em rentas
Hag he zorfet a zisklerias
Da zaou pe dri den ker mantret
Ken e c'hredi na hellent ket.
Erfin, e ti an arc'herien,
E oe laket mad dindan pren.

5

Goude 'n ofern o tont d'ar ger,
Kaloun ar vam a oa seder.
Hogen pa c'hoarvezas en ti
Darbet a oa dezhi simpli
O welet neuze stad euzuz
He bugale karantezuz.

6

Daou vugel oa marvet raktal
Hag an daou all a oa gwell fall.
D'an hospital int bet kasset
Ha mantruz a oa o gwelet ;
Ar baotrez 'zo maro eno,
He breur marteze a vevo.

7

Da Vrest eo kasset ar vatez,
Ar plac'h fallakr ha didruez ;
Hed an hent, an oll dud bodet
Warn-hi a iouc'he kounnaret.
D'al lez-varn prestik a ielo
Houman neuze e c'hastizo.

8

Damantomp eta, me ho ped,
An tad, ar vam, ker glac'haret ;
Goulennomp stard digant Doue
Ra vo miret hon bugale
Ha na vo ken gwelet er vro
Hevelep torfet ker garo.

(Propriété de l'Éditeur — Reproduction interdite)